

CHANSON MARI-LOUIS

Var don : *Fantik koant.*

Me ho ped, Bretonet, da lakat ho speret
 Da glevet eur Chanson a neve composet,
 Zo gret da zaou zen yaouank, var don Chanson
 [Fantik Coant.
 A zo eun ton charmant evit an dud yaouank.

Kavet meus eur sujet da ober eur Chanson,
 Gret da zaou zen yaouank n'eur garie a galon
 Komposet d'ar garante certen e voa entreze :
 Kontant da vervel an eil evit egile.

An daou zen-ma a ro dan oll dud da velet
 Ar garante barfet a dleont da gavet,
 Evel ma eo ordrennet gant an Aotrou Doue,
 M'hor bo oll karante an eil 'vit egile.

Ne gredan ket e ve sur kavet er bed-man
 Eur plac'h hag a rafe evel e deus gret ouman,
 A guitafe e moyen, e c'herent hag e c'hanton
 Evit mont d'ar brezel da heuil e guir mignon.

Hi a voa 'r rouanez eus ar merc'hed yaouank
 A gomzer aneze en pevar c'horn ar Franç :
 N'oa nemet eur baysantez a zo kasset d'ar palez ;
 Zo presentet d'ar roue ive d'ar rouanez.

Hi zo fourdilizen an oll merc'hed yaouank,
 Koulez en e honestis vel en e c'homportamant,
 Zo bet eiz vlas er brezel e servich ar roue,
 Guisket vel eur soudart. den ne anaveze.

Hag ouspen an dra-ze, e vije o repos,
 Gant e brassa mignon hi a gousket bemnos,
 Epad eiz blas anter eo bet gantan en arme,
 Ha bemnoz e kouske gantan eus e goste.

Nag a botret yaouank a zo bet glac'hare.
 E fiout er merc'het zo n'em gavet trompet !
 Pa zontent bea karet, e vijen abandonnet,
 E choment glac'haret hag ive chagrinet.

Houma ne deus ket gret evel a ra 'r seurt-se :
 Hi e deus dalc'het mad certen d'he c'harante,
 Da Yannik, e amoureux, a gare a vir galon,
 Kontant voa da vervel evit e guir mignon.

Guelomp eta, Mari, guelomp an occasion
A zo bet koz d'ec'h-hu da guitat ho canton
N'oa nemet ar garante ho poa evit ho mignon,
Hag a voa sur gravet ebars kreis ho kalon.

Pa vijent daou zen-ma d'ar zul en o farres,
N'eur gavent assembles da barlant alies ;
Eur garante ar vrassa a oa certen etreze ;
Vel ma klefot er fin, voa bras o amitie.

Eun desir vras o doa, ma permetje Doue,
E vijent unisset an eil gant eguile ;
Urz ar Roue ' empeche, ne fote nemet eiz de
Pa deuas an ordrenañ da zervich ar Roue.

D'ar zul en oferen bred e rannas e c'hon.
Pa gleo an ordrenañ, a leune ar Person :
Ha c'hui gleo, emezan, setu m'an ordrenañ,
E ranker soudardet evit ar Roue ' Franç.

Ha permetet e ve, eme an den yaouank,
E re aet din quitat eur vignonez ker koant !
Eur vignonez a garan gant kement a garante,
Hag a rankan quitat evit mont d'an arme !

E sorti ar vered e rencontras e blac'h,
E galon chagrinet ha goal glac'haret bras
Petra c'heus-te, emezi, me vel out chagrinet,
Allas ! va mignonez, ho quitat a vo ret !...

Lennet ê an ordrenañ evit ar zoudardet ;
Me garje birviken n'am bije ho kueleit.
Allon, va mignon ker, eme ar plac'h neuze,
N'eus ket a zizenor e servicha ' ar Roue.

Mar bez soudard vaillant ha non pas eur poltron,
Te vo recompanset gant ar Roue Bourbon.
Kontant e ved, Mari, da vont sur d'ar brezel
Penevert ma ê ret, va douç, o tilezel :

Ia, me a ve kontant da vervel en arme,
Ma c'halfen soupçoni vec'h infidel d'in-me.
Me a vel, ma mignon, penos sur em c'hares,
Ne golli ket da boan : me a vo da vestrez,

Ne vank ket da scrifa din pa vi en da rejimant,
Ha te velo neuze kerkent va zantimant.
Dalit, Mari-Louis, setu eun diamant,
A zo en aour melen, a roant d'ec'h en present.

Zo tesk d'ar garante a meus, va douç, evidoc'h ;
Birviken, va mestrez, ne garin nemedoc'h.
Partial 'ra neuze da vont d'he rejimant,
Vardro daou vis goude e scrif d'e vestrez koant.

Me a zo em rejimant kontant evel eur Roue :
Mes ho welet, va douç, a garfen, va Doue.
Kerkent vel ma klevas e voa er rejimant,
Hag hi monet d'e fres da gemeret arc'hant ;

Kemer a ra tri-c'hant scoet, mont a ra da Bors-Louis,
Goude bea gwisket habillamant bourc'his.
Kerkent e man en hent evit mont d'an Naonet,
E lec'h ma voa Yannik, e mignon angajet.

Pa voe ta eruet er guer gaer an Naonet
Komz eus ar c'hapiten raktal e deus c'hoantêt,
Bonjour, Aotrou, emezi, ha c'houi a angajfe
Eun den a zo kontant da zervicha 'r Roue ?

Evel ma voa gwisket e guis un den yaouank,
Raktal voe angajet ebars e rejimant ;
Ha tri devez goude voe laket en faction
Dirak ar c'hordegard ma voa e guir mignon.

Neuze er saludas gant eur guir reverañç,
Evel ma ê dleet da eur zoudard a Franç,
Hag ar memes nosvez eus e goste e kouskas,
Hep kavet nep soupçon e voa ouman en plac'h

Guelit ar garante eus an daou zen yaouank ;
Epad eiz vloas anter m'int bet er rejimant,
Biskoas assur na zouetas e voa ouman e vestrez,
Hag e vije bennos kousket eus e gostez.

P'oe eru an amzer da gavet e c'honje,
Hag hi mont da gavet e c'habiten eun de :
Setu echu va amzer, Aotrou roit din va c'honje,
Evit ma zin d'ar guer goude servich ar Roue.

Me a c'houlen ouzoc'h c'hoas eur zoudard yaouank,
Zo echu e amzer ebars ho rejimant,
Zo va c'hamarad gwele a garan a wir galon,
Evit ma imp hon daou assembles d'hor c'hanton.

Neuze-ta ar c'habiten a zinas daou gonje,
Evit distrei d'ho pro goude servicha 'r Roue ;
Evel ma yent gant an hent, hi a gane goal grè :
Allon, ni zo tost d'hor bro, va douç, va c'harante.

Pa voent eru tost d'ar bourg, kent antren en o c'haer,
Hag hi da lavaret neuze d'e servicher :
Ne c'heus-te ket er vro-man, emei, eur vestrez-koant
A behini e komzes pa voas er rejiment ?

Allas ! eo-da, emean, n'eur skei var e galon ;
Me meus sur er vro-man, va douçik Marion,
Zo caos on glac'haret oll abaoe m'on angajet :
Tremenet ê an eiz vlas ne meus-i ket gwelet.

Te a lavar gaou, emei ; sel ervat ouzon-me :
Me a zo Mari-Louis, da zouç, da garante,
A zo bet epad eiz vlas eus de heuil en arme,
Hag a zo bet bemnoz kousket eus da goste.

Pa te vel va mignon, aman an diamant
A poa de roet din kent mont d'ar rejimant ?
A voa test d'ar garante a lares poa evidon-me :
Gwelet ec'h eus certen meus evidout ive.

Perag eta Mari, pa voas er rejimant,
E lezes va c'hanton en glac'har, en tourmant ?
Rag me meus da garet certen dre guir garante,
Mes mui e karan c'hoas sur an Aotrou Doue.

Allon-ta, va mignon, demp da di ar Person,
Ha me a ya breman da gonta va rêson :
Va c'hentel zo studiet, me en lakai estonet,
Marteze biskoas plac'h n'en deus-an bet spontet.

Allon, Aotrou Person, eme Mari-Louis,
Hastit eo em guempen da vonet d'an ilis :
Ni zo daou zoudard yaouank o tont eus an arme,
Ha c'houi renk dimezi an eil gant egile.

Ha ! ha ! eme 'r Person, setu eur c'hoari sot ;
Biskoas n'em boa klevet e ve dimeet daou bot.
Nan, nan, eme 'r Person, me skribo d'an Eskop
Kent ma ven oblijet da eureuji daou bot.

Dalit, Aotrou 'r Person, setu daou gonje mat.
Brema me ya d'ar guêr evit chench va dillat :
Ni zo 'n daou eus ar baros, me a zo Mari-Louis,
Zo ganet ez bourg-man, badeet en hoc'h Ilis.

Ah ! ia eme 'r Person, me voar piou out brema ;
Me raio da eured, ne gousto dit netra ;
Me a skribo d'ar Roue evidout, Mari-Louis.
Ha te po an enor da vonet da Baris.

Pa voent bet demeeet, e skrifas da Baris,
A Roue a c'houlen kass dean Mari-Louis ;
Nê nemet eur bayzantez, mes mont a ra d'ar palez
Presentet d'ar Roue koulz ha d'ar Rouanez

Ha pa oue dirazan e present e c'honje :
Ia, Sire, emezi, me zo bet en arme ;
Gout a ran an exerçis ha mania eur zabren,
Ha lakat da dehel meur o adversourien.

Ar Roue mad neuze n'eus-hi rekompanset,
Vel eur zoudard vaillant en devoa meritet,
Rag-se, merc'hed yaouank, redit oll d'an arme.
Hag o po rekompans ive gant ar Roue.



CHOM EN BREIZ-IZEL

War don : *Er Finister ez on bet ganet...*

Kinniget d'ar merc'hed yaouank
a c'hoanta mont da Pariz.

Plac'hik yaouank, perag 'ta tec'hel
Pell dimeuz da vam ha da dad ?
Perag kwitad da vro Breiz-Izel,
Elec'h out evuruz ha mad ?...

Ankoua ar c'heariou,
Gand o falz-madou ;

Enne 'lec'h madou e kavfez trubuilhou.
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel ! !

Ar c'heriou a zo leun a anken
D'an dud zo ennê divroet ;
Ennê ar c'halonou a zo yen,
Karante wirion nan euz ket !

Nemed gwarizi,
Droug ha kasoni,

An holl oc'h en em daga. en em dibri...
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel ! !

Pell diouz da vro kollfez da c'hlanded,
Koll rafes ive da furnez,
Da yec'hed, da nerz ha da c'hened,
Ha da vrud vad a Vreizadez ;

Goude en dizro,
A vo c'hoaz daero :
Ar furnez kollet na deu morse en dro !
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel !!

Da dad, da vam baour zo o ouela,
En o daoulagad daerou kri... !
Piou a roio d'ê eun tam bara ?
Ha piou a harpo o c'hozni ?
'Glevez ket o mouez,
A lar hep paouez
D'id gant karante ha gant kalz a furnez :
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel !!

Petra eta c'hoarve d'ez kalon,
Ma kwitaez eur vro ken koant ?
Petra c'hoantaez, lavar hep aon,
Lavar breman hep nec'hamant ?
Evidout, me gred,
Breiz a zo bepred
Eur vro ar gwellan a ro ebarz ar bed,
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel !!

An douar a roaz d'az tadou
Eur bevanz frank mad ha nerzuz,
A roio d'id, enpad da zeiou,
Magadurez krenv ha yac'huz ;
Bez eta dinec'h,
Gant poan da ziouvrec'h
E vrevi en Breiz gwelloc'h pell 'vit neb-lec'h !
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel !!

Na gwita ket da douriou uhel
Kizellet ha dantelezet,
En pere ar c'hleir en avel
A zon goueliou hon zent karet,
A lid pardonjou,
A gân eurejou,
Hag a lavar d'id dre hekleo o moueziou :
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel !!

Na gwita ket bro da Gendadou,
Bro ar gizioù koz ha fur,
Bro ar chapelioù, ar c'halvarioù,
Bro peb frankiz leun ha disturb ;

Bro ar zoniou kaer,
Ar gwerziou tener,
A ziston bemnoz a-dreuz d'on farkeier...;
O chom en bro da gavel !
Chom. chom en Breiz-Izel ! !

Chom da veva en ez traouiennik,
Elec'h m'eo zavet da di plouz ;
Elec'h ma c'hoariez, bugalik,
Seder ha pell demeuz peb trouz...
Kar da veneou,
Da lann, da goajou,
Gante e klevi dre vouez an aveliou :
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel ! !

Chom da veva en harz an iliz,
Elec'h ma 'z out bet badezet,
Kichen ar vered 'lec'h ma tiskwiz
Da gerent koz pel'zo marvet,
Ha neuze ive
E c'halli goude
Diskwiza gante, 'barz an hevelep be :
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel ! !

Peb tra en Breiz a bed ac'hanoud
Da chom en o c'hichen, 'n o zouez ;
Chilaou anê, holl o deuz galloud
War da galon a Vreizadez...
O kaeran peden
Alaront dan den,
A c'hoanta kwitât e vam-vro da viken :
O chom en bro da gavel !
Chom, chom en Breiz-Izel ! !

Kas pell diouzig ar sonj divalo
An euz trubuillet da spered,
Chom breman da veva en ez pro,
Enni 'z po levenez bepred !
Lavar eveldon,
A-greiz da galon.
Ma klevo Breiziz hon c'hân kaer a gwirion :
Chomomp en bro hon gavel !
Chomomp en Breiz-Izel ! !

AR YEODET.